

REDADEG

Me a zo aet da bourmen e kostez Bro-Dreger
Me a zo aet da gantreal en tu all d'ar mor don
Chomet on da gaozeal gant delfined Bro-Leon (x 3)
Dianket em eus va botoù-ler evit mont a-dreuz ar c'hoad (x3)
N'emaon ket pell diouzh al Loar rak me a chom war an Douar... (x3)

War barlenn ar prenestr laboused o kanañ
O kanañ a-bouez-penn miliadoù a levioù
A zo d'ober me ho ped savit' ta evit mont abred (x3)
Abretoc'h abretañ e savin evit peadra (x3)
N'eus ket tu da dermal n'am eus ket amzer da goll (x3)

Se a ya faaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaall faaaaaaaaaaaaaaall

Lakaet em eus ma anorak
Ankounac'haet em eus va fri-lien
Kollet em eus va manegoù
Pelec'h emañ va c'hasketenn
E mod-se emañ an traoù arabat pennfolliñ (x3)
Kollet em eus div nozelenn va serr-prim o vont a-dreuz (x3)
Stlabezet a bep tu ne gavin ket va alc'hwezhioù (x3)

Ur redadeg eo ar vuhez
Un nozvezh-hir e pleg ar mor
Ur sarpant-nij er gorventenn
Me a zo staget ouzh ur fuzeenn

Se a ya faaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaall faaaaaaaaaaaaaaall

Me a zo aet da bourmen e kostez Bro-Dreger
Me a zo aet da gantreal en tu all d'ar mor don
Chomet on da gaozeal gant delfined Bro-Leon (x3)
Dianket em eus va botoù-ler evit mont a-dreuz ar c'hoad (x3)
N'emaon ket pell diouzh al Loar rak me a chom war an Douar... (x3)

Ur redadeg eo ar vuhez
Un nozvezh-hir e pleg ar mor
Ur sarpant-nij er gorventenn
Me a zo staget ouzh ur fuzeenn

Se a ya faaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaall faaaaaaaaaaaaaaall

Kanet gant E.V

Ar c'homzoù cheñchet evit 30 vloaz Diwan : e kostez **Bro-Dreger** e plas **Bro-Gembre**, gant **delfined Bro-Leon** e plas **elerc'h Bro-Iwerzhon**.